




Ped kwech, e-doug prosesionou Breiz-Izel
ne weler ket kroaziu kaer evel houmañ.

BLEUN-BRUG

Niv. 119 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

GOUERE - EOST 1959

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).

Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.

C. C. P. 544.22 Nantes

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Galloud Doue a ra traou evelse, gand L. B.	1
Pemved Skol-Hañv ar Bleun-Brug	2
Êt da laer (kendalh), gand Mab an Dig	4
Daou hant vloaz a-raog Lourd, ar Werhez a ziskenne 15 kwech war zouar Breiz, gand V. S.	8
Prezegenn an Ao. Kadoudal, da geñver interamant an Ao. F. Even.	11
Teñzor ar brezoneg beo, gand V. F.	13
Keleier	15
Kovig-teo, gand V. S.	17
Bleuniu, gand V. S.	18

Goueliou ar Bleun-Brug

Kaer eo bet c'hoaz or goueliou er bloaz-mañ, e Plougastell, e Langonnet hag e Elliant. Labour dispar a zo bet greet ha laouen om bet o weled e koueze on had en douar mad. Danevell ar goueliou-ze a vo kavet e niverenn genta Bleun-Brug a vo gouestlet dezo penn-da-benn.



133868

Galloud Doue a ra traou evelse

Ober an traou brasa gand ar binviajou disterra !

Setu ar wirionez a weler o para, koulz lavared, e pep pajenn euz istor an Iliz.

Med skedi a ra ar wirionez-se, en eun doare dispar, a-dreuz buhez Person Santel Ars : Yann Vari Vianney, a rêr, er bloazman, gouel ar hantved euz e varo, hag a zo komzet kement anezañ, en oll gazetennou katolik...

Yann Vari Vianney a deuas er bed, demdost da gêr Lyon, tri bloaz araog an Dispah vraz, er bloaz 1786.

Kavoud a reas, e tal e gavel, eun tad hag eur vamm gristen ; da houdori e vugaleaj, eun tiegez, hag e veze pedet ennañ kaloneg, hag a oa digor, noz-deiz, da zigemeret ar re baour hag ezommeg.

Karantezuz, ha devot evel eun el, e tremeno bloaveziou trubuilhuz an dispah, o labourad stard er parkeier.

D'an oad a 17 vloaz, eun deiz, e lavaro d'e vamm : « Mamm, me garfe beza beleg evid gounid maread eneou da Zoue ! »

Med penaoz en em gaoud ? N'oa bet nemed eur pennadig, er skol. E spered, dre 'n' abeg ma n'oa bet digoret, e poent, a oa poud, e vemor a oa berr...

Kant ha kant gwech, e venno fallgaloni, war an hent. A-benn ar fin, goude eleiz a boan, a zismegans, eh en em gavo, e penn, e-leh m'edo Doue ouz e hortoz.

Beleget eo e miz Eost 1815, tro ar mareou ma koueze Napoléon koz diwar tron e hloar hag e follentez.

Epad tri bloaz eo kure, e Ekully. Adaleg neuze e galon a zo tanflammet gand ar youl gounid eneou da Zoue.

E miz C'hwevrer 1818 eo anvet da berson Ars, eur barrezig vihan, ha brudet fall, war ar marhad.

En eur gas anezañ di, ar Vikel vraz a lavaras dezañ : « N'eus ket kalz a garantez Doue, er barrez-se, med c'hwî a lakaio... »

Edoug 41 vloaz, beteg e varo, ar person nevez a zeveno, hed-a-hed, d'an urz-se roet dezañ.

Penaoz en em gemero evid kas al labour-se da benn ? Prezeg, ober kategiz, hep mar ebet ! Med ouspenn e pedo hag e raio pinienn beteg ma ne ouezo morse peur en devezo greet a-walh.

Parrisioniz Ars, da genta, a jomo souezet. Ne welont ket petra glask ar beleg-se diouto... Med tamm ha tamm, hag evel en despet dezo int diarbennet, digaset war an hent mad. An tavarniou a rank sarra, an dañsou chom a-zav, an iliz a zo, a-nevez, darempredet... ar zul a deu da veza devez an Ao. Doue.

Goude 10 vloaz tremenet e Ars, an ao. Vianney a hello lavared o komz euz e barrez : « Ars n'eo mui Ars ».

Met kounnaret-nê, o weled ar beherien o trei kein dezañ, an Droug Spered a raio d'ar beleg santel eur brezel skrijuz. Med koll a raio e boan !

Ar vrud euz ar pezh a dremen e Ars a en em skign dre bevar horn ar vro.

Tud a-vandennou, a beb stad hag a beb reñk, a zired evid klevet ha gweled ar person-ze, a lenn er halonou, a anavez an amzer da zond hag a ra burzudou...

Ober a reont anezañ souezusa ha brasa merzer 'zo bet biskoaz : merzer ar gador-govez... Beteg 17 ha 18 eur e talhint anezañ chadennet evelse, devezioù 'vezo.

Torret ha brevet gand ar skuizder, an den kêz a vezo klevet o lavared : « A, va Doue, peur 'ta e vezo fin euz ar vuhez-mañ : ar beherien a deuio a-benn da laza ar peher ».

Eur peher, setu ar pezh a zoñj anezañ, met n'eo ket ar pezh a zoñj an dud. Ar re-mañ, o tizrei euz Ars, a lavare : « Gwelet on-eus, du-hont, Doue en eun den ».

Diniver eo ar beherien a lakeas war hent ar baradoz. Daoust da ze, eh en em gav ar reuzeudika den a zo war an dour. « An Aotrou Doue, emezañ, e-neus va dibabet evel eur benveg da lakaad grasou an Neñv da ziskenn war ar beherien, ablamour ma 'z oun ar paour hag an disterra euz an oll veleien... »

Mervel a reas d'an deiz m'e-noa diskleriet, d'ar 4 a viz Eost er bloaz 1859. N'e-noa klasket, hed e vuhez, nemed beza eun den Doue, eur beleg, ha netra ken.

Abaoe Ars a zo deuet da veza unan euz al lehiou brasa a belerinajou a zo er bed. Warlene ouspenn 7.000 beleg a zo ét da bedi dirag e relegou.

Plijet gantañ goulenn deom digand Doue lakaad beleien zantel ha niveruz da zevel en on touez ha dre an Iliz a-bez.

L. B.



Pemved Skol-Hañv ar Bleun-Brug

E Kerstears, Brest, euz ar 24 d'an 30 a viz Eost 1959

Prezidanted a enor : An Aotrou 'n Eskob Fave.

Chaloni Prigent, Vikel-vraz, pennrener ar Skolioù Kristen.

Is-Prezidant : Chaloni Ar Ster, eil-pennrener ar Skolioù Kristen.

Penn-Rener : Chaloni Falc'hun, kelenner e Skol-Veur Froazon.

Rener : Frer Visant Seite, sekretour-meur ar Bleun-Brug.

Is-Renerien : Beleien Jos. Seite ha Gourmelon, aluzennerien Bleun-Brug Leon. — Frer K. Riou, kelenner e Baod, ha Frer Danielou, kelenner e Skol ar Groaz-Ruz, e Brest.

Roll-amzer ar Skol-Hañv.

- LUN 24** — 14 eur 30 : (Digoradur) : Dirag an hevelebekaad, gand J. Le Duigou, penn-skrivagner ar « Progrès de Cornouaille » hag ar « Courrier du Léon et de Tréguier ».
- 16 eur - Istor Breiz, gand an ao. beleg Bourdelles, kelenner e Lannuon.
- 17 eur 30 - Deskadurez ha Diplomou, gand J. Cormerais, kelenner e Lise Roazon.
- 20 eur 30 - Beilhadeg : Kanaouennou ar bobl er skol, gand an Ao. beleg Abjean, rener Kanerien Bro Leon.
- MEURZ 25** — 7 eur - Prederiadenn. O selaou Mikel an Nobletz, gand an ao. beleg Colleau, kure Plouvian.
- 7 eur 30 - Overenn, gand kantikou brezoneg, e chapel ar Skol.
- 9 eur 30 - Studi eur pennad brezoneg, gand ar Frer K. Riou.
- 11 eur - Tangi Malmanche, dramaour braz, gand an ao. Abasq, kelenner e Skol an Ofiserien-a-vor.
- 14 eur 30 - Landevenneg, Daoulaz ha Sant-Vaze, gand an Tad Gregoire, euz manahti Landevenneg.
- 17 eur - Buhez al labour-douar e Breiz, gand an Ao. de Guébriant, prezidant Kambr Labour Douar ar Finister.
- 20 eur 30 - Beilhadeg : Sinema.

- MERHER 26** — 7 eur - Prederiadenn.
- 7 eur 30 : Overenn.
- 9 eur 30 - Studi eur pennad brezoneg, gand K. Brisson, kelenner e Plougastell.
- 11 eur - Penaoz sevel istor eur barrez, gand an Dr Dujardin, prezidant Bleun-Brug Leon.
- 14 eur 30 - Istor Breiz, gand an Ao. beleg Bourdelles.
- 17 eur - Brest, gand H. Queffelec, skrivagner.
- 20 eur 30 - Beilhadeg : Penaoz implij danvez Breiz er C'hoariva, gand G. Le Merdy, rener « Compagnons d'Armor ».

- YAOU 27** — 7 eur - Prederiadenn.
- 7 eur 30 : Overenn.
- 9 eur 30 - Studi eur pennad brezoneg, gand ar Frer Uguen, kelenner e Pleiben.
- 11 eur - An Anaon e Breiz, gand Yeun ar Gow, skrivagner.
- 14 eur 30 - Prezegenn war ar gelenmouriez, gand J.-M. Gulleher, euz ar C.N.R.S.
- 17 eur - Petra hell beza dalhet euz gwiskamanchou Breiz, gand J. ar Minor, euz Pont 'n-Abad.
- 20 eur 30 - Kudennou al Labour hag ar Boblañs e Breiz, gand an ao. Martray, sekretour-meur ar C.E.L.I.B.

- GWENER 28** — 7 eur - Prederiadenn.
- 7 eur 30 - Overenn.
- 9 eur 30 - Ar brezoneg hag an Deskadurez, gand an Dr Tricotre.
- 11 eur - Mojennou Breiz, gand R. Omnes, kelenner e Lise Kemper.
- 14 eur 30 - An tiez war meziou Breiz, gand an Ao. Michel, tisa-vour.
- 15 eur 30 - Eun dro-vale e ilizou Brest, renet gand an ao. Michel.
- 17 eur - Istor Breiz, gand an ao. Ollivo, kelenner e Gwen-gamp.
- 20 eur 30 - Beilhadeg. An tiez e Breiz, gand J. Doare.

- SADORN 29** — 7 eur - Prederiadenn.
- 7 eur 30 - Overenn.
- 9 eur 30 - Studi eur pennad brezoneg, gand J. Seite, kelenner e Gwiseni.
- 11 eur - Kentel ar Skol Hañv : Skouer Bro-Gembre, gand an ao. P. Mokaer, is-prezidant ar Bleun-Brug ha prezidant Kendalc'h.
- 14 eur 30 - Pourmenadenn.

Seurezed Kerstears a roio lojeiz ha bevañs d'an oll.

Evid dond d'ar Skol-Hañv, skriva araog ar 15 a viz Eost da V. Seité, Bleun-Brug, Châteaulin.

Ma ne lojit ket e Kerstears ha ma ne gemerit ket eno ho prejou, her roit da houzoud.

Digasit ganeoh ho leor Kantikou brezoneg.

ÊT DA LAER

(Kendalh)

gand Mab an Dig.

V. — Toull al laeron.

Ni en em gavas en hent gand re all. Hag adarre da redeg bro ? An doare d'or ren ne oa ket tener en oll, hag eun Almant e kounnar ne oa ket pell evid lavared deom ar pez a zoñje.

« Truilhou dastumet e pevar horn an Almagn, gagnou heb feiz na reiz ! Pennou-dolog n'eus ket enno eur vlevenn na ve ket leun a fallagriez ! Komunisted lor, ni ho tesko ! »

— Ha va mamm, eme Job, a lavare din : « Dreist-oll diwall ouz ar gwall gompagnuneziou. » Jezuz ! M'her gwelfe, he mabig !



Magajennou braz a oa dirazom. Eun ofiser a deuas.

— Eun enor braz a reom deoh ouz ho tigas da labourad amañ.

An oll a zirollas da c'hoarzin, hag ar paotr a yeas droug en e goukoug.

Ni a oa sanailhet en eun toull, hag e-pad m'edom o reñka or gweleou a dri estaj, setu eun tortig a zen, eur mousc'hoarz doñjeruz war e zremm o tond davedom, o varvailhad e galleg hag o lavared deom :

— C'hwi a deuio da zoñjal eveldom. C'hwi a vezo nazi eveldom.

Ar gwad a zavas d'or penn. Me a glaskas lakaad Job da rei peoh, med youhal a reas.

— Deom da gana kantikou dirag o 'frenecher !

Tra souezuz, an oll — (nag a bed koulskoude ne vezent war-dro iliz ebed) — an oll a heulias Job, hag en noz a ziskenne e savas or moueziou kreñv, unanet o kana :

« Doue 'fell deom... »

Eur hart eur goude e oem kraouiet, morailhet warnom.

D'an deiz war-lerh e oam kaset da labourad war ar foenn, en eul lab.



Nag e plije din ar foenn pa oan bihan, ar foenn glaz a gorolle e-kichen ar goueriu, ar feunteuniou, ar poullou ! En o zouez e save leun a vokedou kaer. Nag a hwez-vad a oa ganto ! Pa zizroen euz ar skolaj, skuiz va 'fenn ha dinerzet va mempro, e yeen da hourvez en disheol er foenneg. Ha dre ma kane al laboused, ar grilhed, an dour, e lezen va huñvreou da nijal. Eur hilhog-raden al lamme war va fri, eur valafenn a blañve war va bleo, eur gveskler a ree din skrija pa deue e gorv yen d'ober illig d'am zreid noaz. Etouez ar yeot glaz nag a euriou dudiuz am-eus tremenet !

Euz a hlaz e teuent a-nebeudou da rouz, hag o c'hwez-vad a greske. Kenta veze klevet er beure : kan ar falherien ha muzik o filhier. Ar yer-dour, an naered, a rede d'eul leh all da glask lojeiz, hag ar vousetaj diarhen a hourine war an dramrou !

Ar yaouankiz paotred ha merhed, gand beb a forhig, a deue en eur gana d'o zrei ha d'o dastum. Peb hini d'e dro e veze goloet gand eur bern : Nag a blijadur er parkeier e pardaeziou mezeven !

El lab teñval, leun a boultrenn du, en Almagn, ne oa ket heñvel. Ar houzoug a veze buan dizeh hag ar horv kailharet. Gand neud orjal a rankem hed an deiz ober hordennou. Micher inouüz ! Ha netra da laerez. N'oam ket deuet c'hoaz d'en em vaga evel an azenned. Ar boued a veze fall kenañ :

ospital ar re baour euz a Nuremberg eo or beve gand soubenn ha patatez brein. Red oa enebi.



Ar huzul-braz en em vodas, a gemennas d'an oll ober o 'fenn fall, sevel digareziou, klask an tu a beb hent d'en em denna euz an toull-ze. 'E-kichen e oa magajennou braz, leun a vevañs mad. En eun doare pe zoare a rankem mond enno.

Goude daou zervez labour grêt a-dreuz — leremmioù trohet, skeulioù torret — pemp pe c'hweh a oe harluet. Me a oa en o zouez.

Kaset e oen da renka boutailhou goullo. Pa vez boutailhou goullo en eun tu, m'ema ket re bell ar re leun ! Ha me da glask an neiz. N'oa ket diêz e gaoud.

Ar re all a oe lakaet er magajennou.

Ar Huzul-braz — kuzul-braz al laeron — en em vodas adarre.

An enebour a oa en ti... al laer war an teñzor. Al laeron all er-mêz. Edo an emgann o vond da ziroll. Red e oa d'an oll deski mad o micher. Hini al laer n'eo ket ken êz ha ma soñjer. Leun a draou a rank da houzoud. Bemdez d'ar pardaez e teuh d'ar skol !

D'ar skol ! Ha na pebez skol !



Job, daou pe dri devez da houde, a zachas ive e gilhorou euz al lab, ha dizale ne jomas den ebed mui enni.

Evel ar zaout er prad d'an nevez-amzer, edom oll war ar peuri druz.

— Amañ ez eus plijadur da gaoud, eme Job. Ni a ray labour gaer !

VI. — Skol al laeron.

« Da genta, ha dreist peb tra, eo red beza didruez. Ma 'z eus unan en on touez hag a fell dezañ labourad e gwirionez, ha nann ober an neuz evel ma reom, ra yelo d'eul leh all ! Evez ouz ar re nevez a deuio amañ : red e vo deom, araog diskiñ dezo ar pez a reom, gouzoud euz a beleh e teuent, petra a zoñjont. Ma n'emaint ket a-du ganeom, e lavarim dezo tehoud. A-hend-all e rankim gweled penaoz en em zizober anezo. E riskl or buhez e labourom : eur gammed a-dreuz a zo gouest d'or holl. »

Evelse e komze mestr braz al laeron, unan euz a Limoj.

« Peb hini, emezañ, o kenderhel, a zo e zever amañ deski d'ar re all ar pez a oar. Breudeur om, peb tra, zoken on deskadurez, a dle beza rannet etrezom oll. »



Job a ziskouezas e gontell, enni eun aotenn. Ar re o-doa kontilli a reas evel-tañ. Paotr ar Homedi a ziskouezas deom e lavreg : e hodellou a ziskenne beteg e votou. Nag a finesaou a oa en e gorv d'hennez ! Gand eun taol biz-troad e plade eun den. Gand eur hoz tamm las e krouge eur hi hag a deue dezañ alamm — eur hi koulz hag eun den — en eur vond gand e hent.

Eun all a zilanse n'eus forz peseurt skoulm, mouchet e zaoulagad. Skoulma 'ouie avad, ha ne ouie den freuza e skoulmou.

Unan euz a Lill a ouie, nann penaoz parea ar hleñvejou, met penaoz ober an neuz d'o haoud. En eur hart eur e pake terzienn eur marh, pe e veze ruz-tan e zaoulagad. Gand eun aval-douar e lakae e har da goeñvi ; gand eur reunenn e pake eur fubuenn.

Traou mad da houzoud, rag eul laer, pa ne ve ken evid chom da zanailha an traou laeret, a ranke seblantoud beza klañv.

Unan euz a Bariz a oa mestr war ar hartou, hag a ree ganto a beb seurt troiou kamm.

Unan dreist-oll a youhe evel ma kare, gouest da lakaad da fazia ar hilheien, an azenned, ar hezeg, ar brini.

« O pennad ! eme vestr braz al laeron, selaouit 'ta. Kemerom yez an anevaled. Pa vo eun taol kaer d'ober en eun tu, kan ar hilhog. Ni a responto : klok, klok, klok, evel ar yer. Ma 'z eus eur riskl bennag e raim evel ar vran. Peb youh aneval e-nevo e dalvoudegez. D'al labour, paotred ! »

Unan euz a Vourdel, gand eun tamm neud-orjal, a zigore n'eus forz peseurt potailh.

Nag a draou ! Nag a draou !

— Me n'on ket mui re zisoursi amañ, eme Job. Amañ n'eus ken nemed laeron, ha laeron a bell 'zo.

Ni a yeas bemdez d'or skol, ha bremañ, tudou, ni a zo kreñv war ar vicher. Diwallit !

VII. — Ar jabadao !

Dirollet oa ar jabadao ! Eur vagoniad vara on-oa greet ar stal outi.

Gwin Porto a oa en em gavet. Nag a dud a glañvas gantañ ! N'eo ket ober an neuz ha n'eo ket dre ma oa fall. Diskenn re vuan eo a ree, hag eur vlaz souezuz e-noa, a lakae an dud da vond davetañ.

Sahadou bleud euz ar gwenna on-oa sammet, sahadou lêz dizouret lakaet e poultr ha sukret mar plij !

Eun deiz eh em gavas diou pe deir bagoniad sardined, ha nag a beleh e teuent ? Euz a Zouarnenez ! Ar re-ze on anaveze Job ha me, hag a deuas davedom, êz deoh gouzoud.

Mestr braz al laeron e-noa lavaret deom : « Arabad laeronsi bñan. Emaoh e riskl da veza paket abalamour d'eur hodellad traou a netra. Nann ! Laeronsi braz, atao, pa hellou ! Laerit ! Laerit ! Ar pezh na hellom ket debri, ni hel lakaio en douar. Freuza, dizeha ar vro-mañ eo a rankom ! »



Paotr ar boutailhou goullo, pa deue unan bennag da varvailhad gantañ, a lavare dezañ, en eur c'hoarzin, digor e hinou frailhet ha dizant : « Hemañ 'zo greet gantañ. » Hag e troe e viz kamm war gorn e 'dal.

Gand va gravazog atao edon va-unan euz ar vandenn. Ne zelaouen grik euz ar pezh a gontfe. P'en em fazien, o teurel boutailhou bihan e-touez ra vrasoh, — ar pezh a reen atao pa hellen —, e youhe. Me a oa war evez. Eur zutadenn, eur youhadenn, a helle va gervel.

Gotogogog ! Sell ! Eun taol kaer adarre er vagajenn.

Den war-dro ! Klok ! Klok !... leiz va genou... leiz va hornailhenn... : Miaou ! Miaou ! Ezomm a zo skoazell ! Ha me da hourichal evid embann edon o vond.

Va 'faotr koz a zounne o c'hoarzin.

— Louaj diot, mobarhas, nouch diempennet ! emezañ. Eur barr kleñved a zo warnout adarre. »

Dispourbellet va daoulagad e va 'fenn, ar glaourenn e va ginou, va hrabanou o krena, dispak evel skilfou eur sparfell e youhen :

— Me a rank mond da zizoura !

— Kerz 'ta buan, lechefre daonet, emezañ.

Ha dao d'an emgann.

A-wechou va harg oa hebken kreski niver ar ginaouerien. Ni en em lakae nao pe zeg da zelled en eur zal goullo pe enni Almanted, a vanne on divreh, a ree an neuz da guzulikad.

Ar gwardou a zoñje : « Sell, emaint adarre o vond d'ober eun taol fall. Deom goustad dezo. Hag e teuent da gemeroud tro evid paka ar gedon en o neiz.

Al labourerien a ziwalles ar magajennou, o biz war o ginou a lavare an eil d'egile :

« Ahont ez eus paotred o vond er zah ! » Kamaladed deom a oa karget da lavared dezo uhel :

« Na pebez liou ! Emaint paket ! Deuit 'ta da weled. »

Hag e teuent, an tosta ar gwella, o tilezel ar stal gand al laeron na hedent nemed an dra-ze evid sailha ha samma sahadou, kestennou.

« Koukoug ! Koukoug ! » a gleved er penn all. Ar bevañs a zo sanailhet. It adarre d'ober an neuz da labourad.

— Pare out, Yann Banezenn, labeskenn laer e vara ? C'hwez ar bouh a zo ganez ! eme va rampog koz.

Pep hini e-noa evelon eun doare, med disheñvel, d'en em denna, pa veze ezomm anezañ, doareou farsuz a-wechou. Unan a ranke kaoud lansou nevez diou pe deir gwech bemdez ouz e votou. Pa vezent bet douget eun tachadig, o zenne, o choke. Heb e jikad ne oa netra d'ober gantañ hag e ranke mond da glask re all.

Eun all e-noa, emezañ, eur relijion a hiz nevez. Ha ped gwech evid dastum, boda adarre ar hinaouerien e kouezas d'an douar oh astenn e zivreh, o soubla e benn, oh ober a beb seurt jismaikou, en eur lammad beteg dialana !

— Souezuz eo, eme eun deiz eun Almant d'eur hamalad hag a ouie o yez. Nag a dud diempennet a zo en ho touez !

— O ! ni 'zo evel lostennachou. Ne ouezom ober netra, ha n'eus ket bet ezomm ahanom e leh all. Gwir eo, leun ahanom n'emañ ket mad o 'fenn. Sellit hennez o tond en eur gana, den ne oar e pe yez, da zigas tizan tilh d'e gamaladed d'o merenn-vihan.

Job an hini oa, hag e tregerne gantañ son « an Hini Goz ».

An oll a gomprenne ouz e gleved e-noa adarre, gand e alhweziou faoz, taolet e bao war ar hognak, hag e tiredent gand an diskan anavezet gand an oll :

*An hini goz eo va dous,
an hini goz eo sur*

da gerhad o banne tizan.



Ar pezh diêsa da laerez oa ar hafe. En eur vagajenn diwallet mad e oa dalhet e sier a gant ugent lur. Netra d'ober evid e baka eno !

Ar hamion e yeem ennañ war ar sahadou a lakae a-veh eur hard-eur d'en em gaoud.

Eno ha buan eo e ranked dond a-benn euz an taol : dilansa pe diswriad eur zah, leunia or godellou a ziskenne beteg or zeulioù. Lavregou-dindan hir a veze ive ganeom evid al labour-ze, lanset stard diouz an traoñ.

— Digor da lavreg ma vouetin ! eme Job en eur c'hoarzin. Hag ar hafe a ruilhe beteg an traoñ oh ober illig d'am divesker.

Gleb-teil o c'hwezi dour euz or penn e rankem goude-ze sevel sahadou war or hein, dre eur skeul houarn heb garidou, ront he barrinier beteg eur halatrez, daoulagad du o para warnom, ha fuzulioù o lugerni harp ennom !

Ouf ! Nag on-oa mall sachha pell ahano or ribotou !



Laerez ! Laerez ! Ne reem mui ken netra nemed huñvreal a daolioù kaer. Or barrakenn a oa deuet da veza eur vagajenn ne ziouere netra enni. Evid gorren or madou on-oa toulllet don dindanni. Or prejou a deue da veza leinour eured gand gwin a beb liou. Eur pardaez em-eus gwelet lakaad en douar e-kihenn pevar hant lur kig dañvad. Ni a deue da veza figuz. Kov a zave ouzom hag on dioujed a gemere liou avalou dudiuz eur presbital.

Ni a c'hoarze ! Ni a gane ! Na pebez jabadao !

(Da genderhel.)

200 vloaz a-raog Lourd ar Werhez a ziskenne 15 kwech war zouar Breiz

Tri leh e Breiz a zo anvet « *Kerrien* » : diou barrez ; unan e eskopti Kemper, tostig da Gempelle, eben e eskopti Sant-Brieg, tostig da Zant-Nikolas-ar-Pelem.

An trede « *Kerrien* » n'eo nemed eur geriadennig war ar miz, war lez koad Loudeag, e parrez « *Prenessaye* » e eskopti Sant-Brieg.

Euz ar geriadennig-mañ eo e fell din komz.

Intron Varia Gerrien.

Eun hanter-dousenn diez, war eun dorgenn hlaz en-dro d'eur japel gaer, setu hirio Intron-Varia Gerrien.

Eur japel eo, darempredet kenañ, dreist oll, d'ar 15 a viz Eost, ha d'an 8 a viz Gwengolo, deiz ar pardonioù braz a reer eno beb bloaz.

D'an 21 a viz Gouere 1950, an aotrou'n Eskop Coupel a Zant-Brieg a roe da anaoud e vije kurunet e Kerrien d'ar 15 a viz Eost, skeudenn vuzuduz ar Werhez Vari, gand an aotrou Kardinal Roques arheskob Roazon, dirag oll eskibien hag oll ebed Breiz.

Ouspenn 20.000 dén en em gavas eno en deiz-se, ha dirazo, en ano On Tad Santel Pi XII, an aotrou Kardinal Roques a lakas war benn an Intron Varia eur gurunenn aour kinklet gand e-leiz a dresadennoù breizeg ha keltieg.

Perag ober kement a enor d'eur skeudenn goad el leh-se ken kuzet ?

Eun istor goz.

Kement-mañ a dremenas en amzerioù ma tiskennas ar Vretoned eur Breiz-Veur war zouar Breiz-Vihan, wardro ar VI^{ed} kantved.

Sant Gal, euz Bro-Iwerzon, bet o pardona e Rom da heul e vestr braz Sant Kolomban a dremenas dre geriadennig Kerrien hag a jomas eno a-zav eur pennad evid prezeg an Aviel.

Sevel a reas d'ar Werhez mamm Doue eur chapelig hag enni e lakas eur skeudenn goad d'ar Werhez bet kizellet gantañ.

Gant e vaz e toullas an douar e-kichen, hag euz an toullig e redas dour sklêr eur 'feunteun, anvet hirio c'hoaz feunteun Sant Gal.

Pell goude, ar japel a gouezas en he 'foull hag ar skeudenn goad kollet dindan an dismantrou, ken kollet ma ne jome mui roud euz netra, er XVII^{ed} kantved, nemed euz ar 'feunteun a reed anezi neuze « Poull Sant Gal ».

An istor vuzuduz.

Neuze eo e teu an istor goz da veza kaer ha burzuduz. N'eus ket kaerroh istor e Breiz. Klevit kentoh !

Eur verhig 12 vloaz, d'ar 15 a viz Eost 1652, a ziwalhe he deñved en eur prad war ziribin, tostig da boull Sant Gal, hag ar verhig-se, anvet Janedig Courtel, a oa bouzar ha mud abaoe he ginevelez.

Eur barrad avel a zavas en eun taol krenn ha Janedig a wél dirazi, douget war eur goabrenn, a uz d'an douar, eun Intron gaer meurbéd.

Komz a ra, hag ar verhig bouzar ha mud beteg neuze, a glev mad ar homzou :

— « Pastorez goant, ro din unan eur da zefved. »

Hag ar bastorez a hell komz he-unan koulz ha forz piou :

— « An deñved-mañ n'int ket din-me, med d'am zad. Mar fell dezañ me' vo laouen braz o rei unan deoh. »

— « Kerz' ta neuze da houlenn digantañ, plahig. »

— « Hag ez an ; méd piou a ziwallo va denved ? »

— « Me va unan ! »

Hag ar verhig d'ar gêr d'ar réd. An ti a oa leun a dud, deuet da bourmen, o veza ma oa gouel an deiz-se.

Pebez strafuilh en ti pa oe klevet Janedig o komz hag o lavared petra ? !

— « Eun Intron gaer, douget war eur goabrenn, a houlenn diganin unan euz an deñved ! Ha kontant oh da rei, tad ? »

— « O ! va merhig n'eo ket eun danvad eo a roin evid eur burzud ken kaer, med ar parkad deñved en e bez. »

Ar bastorez a zistroas d'ar réd daved an Intron :

— « Roet e vezo deoh ar parkad deñved en e bez. »

An Intron a vousc'hoarzas d'ar plahig hag a yeas kuit.

Hag evel eul luhedenn, ar helou burzuduz a redas ar vro a-bell hag a-dost, ha pep hini a 'felle dezañ gweled ha klevet ar verhig bouzar ha mud hag a gleve hag a gomze bremañ kenkoulz ha n'euz forz piou.

En deiz warlerh e oe kaset Janedig d'ar presbital, hag e kontas d'an aotrou Audrain, person, an istor vuzuduz.

« Lavar d'an Aotrou Person sevel din amañ eur japel. »

Beteg 15 kwech e teuas an Intron gaer da weled ar bastorez, euz gouel Maria-Hanter-Eost beteg deizioù kenta miz Gwengolo.

Eur wech e lavaras dezi :

— « Me eo ar Werhez Vari. Dibabet em-eus al leh-mañ evid beza enoret. Lavar d'an Aotrou Person sevel din amañ eur japel. »

— « Me ne don nemed eur baour kêzez pastorez. Penaoz kaoud arhant da zevel eur japel ? »

— « An arhant ne vanko ket. Pelerined a deuo euz peb leh. »

Hag ar verhig a gemennas d'an Aotrou Person, c'hoant an Intron gaer. Med hemañ, nehet maro, ne grede ober netra.

Ar bastorez, glaharet braz, a en em glemmas ouz an Intron gaer :

— « Ne 'fell da zén ebed va hredi pa lavaran e houlennit eur japel. Petra da ober ? »

— « Laka klask en-dro da 'feunteun Sant-Gal. Eno e vo dizoloet eur skeudenn ahanon hag a lavaro eo gwir da gomzou. »

Tud ar geriadenn o doullas en-dro d'ar 'feunteun, hag a gavas ar skeudenn goad : eur Werhez, he mabig Jezuz ganti etre he divreh. Hag el leh-se end-eün, eur vaouez he-doa gwelet tri 'flamm-tan o tond euz an douar.

Dirag ar burzud, Janedig, da genta, en em daol war he daoulin hag a bok d'ar skeudenn. Ar re all a ra evel di.

En deizioù warlerh, ar belerined a deu euz peb leh, ha dirag imaj ar Werhez pedennoù a zav heb paouez.

An Aotrou 'n Eskob ha Janedig.

An aotrou person a jom ken nehet ha ne lavar netra.

Neuze 'ta, n'eus ken d'ober nemed mond da gaoud eskob Sant-Brieg.

Daou zen a yeas gand ar plahig beteg Sant-Brieg : eur veaj hir ha skuizuz !

An aotrou'n Eskob de la Barde a zelaouas gand evez ha madelez lavarioù ar plahig, a reas outi goulennou hag a lakeas e vikeled-vraz ive d'he goulennata.

Skoet e oe an eskob gand didro ha lealded Janedig Courtel. Méd ne lavaras ket e zoñj diwarbenn an darvoudou.

Sevel a reas avad eul lez-varn evid studia piz an afer. Eun enklask hir a oe greet. Klevet e oe eur bern testenioù. Pep tra a oe skrivet ha studiet.

Goude beza klevet ar varnerien, an aotrou 'n Eskob a zivizas mond e-unan beteg Kerrien, el leh m'ah erruas d'an 10 a viz Gwengolo 1652.

Kleved a reas adarre Janedig Courtel hag ar re oll a oa bet greet burzudou en o-heñver, rag e-leiz a vurzudou a oa bet greet dija gand ar Werhez.

Evid en aotrou 'n Eskob, ar gont a zo sklêr : ar Werhez a oa bet en em ziskwezet, e gwirionez, d'ar bastorez vihan. Araog distrei da Zant-Brieg e fellas dezañ benniga mên kenta ar japel nevez.

Ar belerined a gendalhe da zireded niveruz ; ar profou a goueze brokuz. Al labouriou a hellas, dre-ze, mond buan en-dro. Prestig, ar bardonerien a gavas eno eur japelig d'o digemeret, ha d'o goudori diouz ar gwall amzer.

Méd, ar japelig-se, e koad, ne oa nemed evid gortoz. En deiz ma oë ben-niget e oa e Kerrien ouspenne 1.600 perhirin.

Ar Werhez a zelaoue pedennou he bugale. Ar pareañsou a oa ken niveruz ganti, ma oe anvet « Intron Varia peb Sikour », hag hirio c'hoaz e toug an ano kaer-se.

Kantikou a oe savet. Da gredi 'zo e oe unan ivez e brezoneg, rag niveruz e veze ar vrezonегerien e-touez ar bardonerien.

Ar japel a weler hirio e Kerrien a zo euz ar bloaz 1656. An tour braz avad a zo kalz nevesoh.

Eur chapalan a oe anvet d'ober war he zro ha da zoursial ouz ezommou spirituel ar bardonerien. An traou a gendalhas evel-se beteg an Dispah-vraz.

E Kerrien evel el leh all, an Dispah a reas reuz. Ar hleier a oe teuzet, al listri sakr, an arrebeuri iliz, hag ar gwiskamanchou laeret, ar skeudenn vurzuduz kollet, devet moarvad. Ar japel hag he madou gwerzet... Eun druez !

Kerkent hag echu ar reuz braz, Intron-Varia Gerrien a resusitas ken kaer ha biskoaz, beteg ar bloavez 1950, a welas an deiz kaer ma oe kurunet ar skeudenn nevez gand an Ao. Kardinal Roques, eskob Roazon.

Petra deuas Janed Courtel da veza.

Janed Courtel goude he gweledigeziou a jomas da veva e ti he zud, e Kerrien.

Konfirmet e oe d'an 30 a viz Gwengolo 1653.

Beva' reas dilorh, doujet ha karet gand an oll. Bez e oe maeronez d'eun toullad mad a vugale euz ar horn-bro.

Dimezi a reas er bloaz 1675 ha dond a reas dezi pemp a vugale. Tri anezo a varvas yaouank flamm : diou verh hag eur mab. Diou verh all a jomas beo.

Janed a varvas e miz Here 1703. War he goulenn e oe beziat er japel, dirag an aoter vraz. Divrud a-hed he buhez, chomet eo ken divrud all goude he maro, evel Yvon Nikolazig an hini a welas Santez Anna.

V. S.

— Ar re a 'fell dezo kaoud muioh a sklerijenn diwarbenn I.-V. Kerrien a hello prena : « Histoire du pèlerinage de Querrien », par l'abbé Le Texier. En vente : Maison des Sœurs, Querrien, Prenessaye (C.-du-N.).

Prezegenn an Ao Kadoudal, euz a Voulbriag, da genver interamant an Ao Fransiz Even, « Karevro »

Pa n-eo red d'eun den komz en eur vered, e sant e galon o krenañ, dirag brazder tefival an Ankou, med komz euz eun den koz enoruz, greet gantañ kement a labour evid e Vro, a zo brao awalh.

An Aotrou Even, noter koz e Landreger, e oa ganet e Lannbeur, bro-Goelo, bremañ zo tost da daou vloaz pevar ugent.

Evel ma n'eus tremenet e oll amzer, abaoe e yaouankiz, o tivenn ar Brezoneg, ez eo dleet ivez komz e Brezoneg dirag e gorv.

Frañsiz Even goude beza desket brezoneg c'hweg war barlenn e vamm, heuilhet skol e barrouz, eh eas enpad eun nebeud bloaveziou da skol Vistri Sant-Brieg.

Paotr yaouank e teuas da zigenta da labourad 'vel skrivagner-noter da Bontreo ha goude-se da di e Aotrou Landouar, noter e Landreger, euz pehini e kemeras diwezatah ar garg.

Enpad bloaveziou ha bloaveziou, an Ao. Even, gand ar brasa leaded, 'n eus dalhet ar garg pouneruz-se heb disvia tamm ebet euz eeunder, o rei dalhmad d'e ostizion ar gwella aliou, — aliou pouezuz ha talvoudeg evite.

Deuet war an oad, a roas e zilez d'eun den anavezet mad gantañ, hag a heuilheche e roudou.

E tu all d'e vicher a noter, buhez an Ao. Even e-neus bet muioh a ledander. E kerz bloaveziou diweza an naonteg kantved, tud hag a gomzer dioute hirie, a n'em zave, e Breiz a bez, evid harz da vond d'an argoll kaerder o Bro.

E-mesk an dud-se, nan eus komz nemed euz Frañsez Vallée, Erwan ar Moal, Fransiz Even, Anatol ar Braz, Jaffrennou, Erwan Berthou hag all... Nag a zeveziou, nag a vloaveziad, n'eus redet dre Vreiz a-bez Frañsiz Even, 'vid eila Fanch Vallée — *Abhervé* — ha *Dirnador* (Erwan ar Moal), evid dastum kontadennoù, kanaouennoù, tonioù; ha d'ar houlz-se al labour oa hir ha diaez, on hlaskerien n'o devoa ket an ardivinkou a hirie, nag evid ober an hent, na 'vid skriva, nag evid tapoud an tonioù muzik.

Pa zoñjas Fanch Vallée ober *Kroaz ar Vretoned*, kazetenn e Brezoneg-penn-da-benn, Fransiz Even a zo ennañ c'hoaz evid e skoazella.

Gand *Dirnador*, hag an ao. Perrot, Fransiz Even a zo eur sikour braz d'ar *Bleun-Brug* ha da di moulerez *Emgleo Sant Iltud*.

Goude eur veaj e Bro-Gemre ha savedigez *Gorsedd Barzed Breiz*, Fransiz Even dindan an ano « *Karevro* » a deu da veza Barz, evid echui evel Drouiz, hag ar bloaveziou diveza euz e amzer kosa *Drouiz a Vreiz* — hag amañ a-berz « *Stivellig an dour don* », Drouiz Meur Breiz, dalhet gand e labour e pell bro e kasan d'on henvreur « *Karevro* » salud diweza e geneiled.

Ar gazetenn vraz « *Breiz* », lennet beb sunvez, enpad bloaveziou, en Treger, Kerne ha Goelo, renet gand *Dirnador*, eilet gand Fransiz Even a lake youl Breiz da vleunia 'n'on Bro ; rag daoust d'e labour pemdezieg Fransiz Even a gave hoaz an tu da brederia gand bugale ar skolioù hag al levrioù skol.

Gouiziege war e yez, on mignon koz a labourer bloaveziou 'zo war eun dachenn vraz evid ar Brezoneg, eur geriadur a zo chomet diembann, ha me gred e vo kavet e Breiz tud a galon 'vit embann al labour-se, labour e-nevo kement a dalvedigez 'vid ar Vretoned.

Ano Fransiz Even « *Karevro* » a jomo beo etouez ar Vretoned, evel m'eo chomet anioù Fanch Vallée, Yann-Vari Perrot, *Dirnador*, *Taldir*, an Ao. Lec'h-vien, Erwan Berthou hag all...

Pa vo komzet euz savedigez Breiz abaoue war dro bloavezioù mil nao hant betek an amzer a vremañ, ano Fransiz Even a vo dalmad embannet, enoret ha komzet outañ gand doujañs evid al labour vraz greet gantañ dre garantez evid e Vro.

Kristen rik ha Breizad penn-kil-ha-troad, goude eur labour talvoudeg 'vid e Vro hag evid e genvroiz, e-neus rentet e ine kaer d'e Grouer.

Sur on eo bet digemeret e Porzioù ar Baradoz gand Sent Koz Breiz e-neus kement enoret 'n e vuhez.

Sant Erwan a vo e vreutaer e lez varn an Aotrou Doue hag Itron Varia ar Porz Gwenn hen kemero dindan he mantell.

A-berz ar Vreiz hag a houe ervad ar holl a reont dre varo o mignon Fransiz Even, e pedom tiegez ar Barz Koz, e Itron, n'eus e heuilhet hag hen skoazellet, e vugale hag e vugale vihan, da zigemer euz a greiz on halon, on gourhemennou a gengañv, ha 'n eur bedi evid on heneil, e pedfom ivez evid e dud ha ma roo nerz dezo 'n o 'foaniou.



KORN AL LIZIRI

† Le 16 Juillet 1959.

Très cher Frère V. Séité,

Nous sommes en train d'organiser trois journées pédagogiques pour l'enseignement du basque dans les écoles. Nous avons pensé qu'une exposition de ce qui se fait dans d'autres régions pourrait être utile. Pourriez-vous m'adresser « Le Breton par l'Image » et la méthode « Yez Hon Tadou » ? J'ai lu le compte rendu de vos conférences scolaires dans *Breiz* du 15 Mai 1957. Cela m'a paru fort intéressant. Le « Bleun-Brug », comment organise-t-il ses concours de langue bretonne ? Pourriez-vous nous procurer quelques livrets qui servent à préparer les concours de culture bretonne ? A combien de copies arrivez-vous ? Quels sont les livres utilisés par les « écoles libres » en dehors des deux ouvrages demandés plus haut ?

.....
Veuillez agréer, Très Cher Frère, l'expression de mes sentiments religieux.

Abbé Pierre LAFETTE,
Directeur du journal « *Herrla* »,
Ustaritz (Basses-Pyrénées).

TENZOR AR BREZONEG BEO

(kendalh)

16. Cheroh.

= Arched (St-Segal, J. Madec, 1942). E Skaer e vez lavaret « *arh* ». Ernault a kriv *serch*.

[F.F. Moavad distresadur diverret euz cercueil pe sarcophage.]

17. Cheulg.

Diskleugen, diholhed (se dit de quelqu'un qui a une tenue négligée, qui présente mal. *Lafez* à St-Nic. (Peron, 1942).

18. Chi.

E Skaer e vez lavaret « *chi 'ta !* » evit goulenn peoh.

19. Chiboudig.

Gonideg : interjection : debout, levez-vous. On le dit plus ordinairement à un chien auquel on veut apprendre à se tenir sur ses pattes de derrière.

« *Ober chiboudig* » e Gorre-Leon, evid eur hi a zo chom sonn azezet war e ziadrefiv.

Diwar-benn an dud e vez lavaret ive pa reont peb tra evid beza gwelet mad, pa en em izelaont evid tremen diouz unan bennag. « *N'eo ket eun den da ober chiboudig dirag n'eus forz piou.* »

20. Chichant.

Er Vro Vigoudenn hag e Goezeg = gai, jovial. « Chichantoh eo hirio. » (J.-L. Peron, 1943).

21. Chig.

Evid diarbenn ar moh (St-Vig, Peron, 1942). E Kleder e vez lavaret « *si* » ; e goueled Leon kement all.

22. Chikardi.

Er Vro Vigoudenn = agacer ; ahano : *chigarder*. E St-Vig e vez lavaret : erezi, a dalv ive evid « *envier* ».

23. Chipotal.

« *Eur paotr dijipot* ». Eur paotr eeun, êz kaoud afer outañ.

24. Chistrouenn.

= Faiseuse d'embarras, Peron, 1943).

25. Chobar.

Trainard, peu dégourdi (St-Vig, Peron, 1943).

26. Cholgenn.

Cholgemou, diou jolgenn : loudourenn ; *cholgenni*, e galleg : « *salir* ». « Me ne 'z an ket da lakaad va dilhad-sul ken abred-se, *da jolgenni*. » (Skrignag, Perrot, 1941).

[F.F. Cholg-, cheulg-, chelg- a dle beza ar memez gwrienn.]

27. Chom.

« *Lavaret ez eus deom chom amañ* », nompaz mont kuit.

Eun tachad 'zo e weler ivez ober implij euz ar verb chom evit lavared ober an annez. « *Va c'hoar a jom e Kemper* ». N'eo ket reiz kement-se. Dleet e vefe lavared : « *Va c'hoar a zo o chom e Kemper*. »

28. Choucha-moucha.

= e kuz. « *Gwerzet am eus va gad choucha-moucha.* » (St Segal, Y. Madec, 1942.)

[F.F. Keñveria gand chuchu-muchu, kuzulikerez a vouez izel : « nag a juchu-muchu a zo ganeoh aze ».]

29. Chorgellad.

Kerzed ponner ; ar horv braz o kosteza euz eun tu d'egile : an dra-ze a zigouez muioh hoaz pa vezer koz, pa vez laosk ar hroaz-leh, pa vez bet torret ar horv gand al labour. — « *Chorgellad a ra ar vamm-goz.* » « *Chorgell eo.* »

« *Chorgellad a ra ar harrad eost* », ken fall ha m'eo an hent, pe o veza ma n'eo ket bet stardet mad awalh al liemmenn pe ar funiou.

[F.F. Chorgell am eus gwelet rei evel lez-ano gand moused en eur skol d'eun den garr-goad hag e-noa kollet e harr er brezel.]

30. C'hoari.

1) « *O c'hoari gand e voned ema.* » N'ema ket mad e spered.

2) « *C'hoari an dro d'ar park* » gweloh eged ober an dro.

3) « *C'hoari tro-libo* (pe tro-libod) da unan bennag, eun dro gamm dre 'finesa. « *Lavaret e-noa din e vefe chomet en ti ha padal e-neus c'hoariet tro-libo din*, n'ouzon dare penôz na peur. »

4) « *Petra 'zo c'hoari gantañ ?* » Petra e-neus ? petra 'zigouez gantañ. « *Peseurt kleñved a zo c'hoari gantañ ?* » [F.F. er V. W. : petra c'hoari gantan. Me gredfe e ve gweloh gweled aman, n'eo ket c'hoari, med c'hoarvezoud, gand c'hoar-eo, c'hoar-i(v) evid c'hoar-vez.]

5) « *Defod kaoud eur marh-houarn ema ar c'hoari gantañ.* » An dra-ze eo a zo en e benn.

6) « *C'hoari ma vefes deuet...* (lakom e vefes deuet).

7) « *C'hoari e baotr.* » Kaer en-do c'hoari e baotr, e ranko plega (c'hoari e benn 'fall).

8) « *Diwar c'hoari ne deu netra d'ar gêr* » a vez lavaret d'ar vugale ha d'ar re yaouank pa vez torret eun dra bennag diwar c'hoari, pa vez gloazet unan bennag, pa zao sikan. « *Lavaret am-oa deoh : diwar c'hoari...* »

9) C'hoariellèrèz = enfantillage.

31. C'hoarzin.

Daoust hag atao e reer mad an diforh etre c'hoarzin ouz ha c'hoarzin da.

« *Ar baotred yaouank a c'hoarze ouzin*, al laboused a gane er girzier... » c'hoarz da ober laouenedigez dezi.

« *Eun tok distrantell e oa war va 'fenn hag an dud a c'hoarze din* » a rae goap ahanon.

32. C'hwitellad.

« *Kas da c'hwitellad kiohed* », éconduire quelqu'un. (St-Vig. Péron, 1942.)

Lavaret e vez ive : « *Kas da zutal er burlu* (pe brulu) e *Menez Are* », pe « *Kas da zutal* » nemed ken.

D

1. Dachad !

Evid diarbenn ar hizier (St Vig, Peron 1942). *Dachad* e Tregon (Kerlan 1941).

2. Daéz.

Ernault a lavar « *Corniche* ». E Gorre-Leon eo anavezet ar ger e « *daez-welc* » pe « *daez* » heb mui, distaget « *deaz* » : plankennig pe estajerenn war diaraog ar gwele-kloz, uheloh eged an noriou. « *War an daez e kavi va butun ha va alumetez* ».

3. Dah-dah !

= evid gervel ar moh (St Vig, Peron 1942). E Plouarzel e vez lavaret « *doh ! doh !* » (Mab Arzel 1942).

Vallee (1942) : *Doh* : unan euz anioiu koz ar moh, miret en ano-leh « *Koad-an-doh* ». Ahano : *doc'hal* « crier comme un porc », skrivet a-dreuz « *Toc'hal* » e levr « *Itron Varia Garmez* ».

4. Damant. Damanti.

E Gorre-Leon dreist-oll = épargner. « *Damanti a ra d'e har 'fall* », ne bouez warni nemed an nebeuta ma hell. « *N'e-neus ket a zamant na d'e boan na d'e yehed.* »

5. Daou.

1. « *Mond a ri d'ar 'foar warhoaz ?* — N'ouzon ket awalh, *etre 'n daou emañ* » (Skaer) = chom a ran da nehi o klask divizoud petra da ober.

2. « *Hirio ema ar yaou*
« *Echu ar zizun nemed daou.* »
(Rimadell a vro Leon.)

6. Darbar.

= preder, soursi (Kleder). « *Darbar am eus gand va mab a zo soudard* ». — « *Darbaret on gantañ* ». — « *Darbaret on o klask gouzoud petra da ober.* »

7. Dardoup.

Eun den euz takad ar Hastell-Nevez, Ploneve-ar-Faou, Speied, Landelo ; an ano-ze a vez greet gand ar Rouziked euz tud ar parrezioù-ze. Liester : dardouped : g.g. dardoupez ha dardoupezed. (St-Segal, Y. Madec 1942.)

V. F.



KELEIER

Maro an Aotrou Leon Toulemon.

Breiz hag ar brezoneg a zo o paouez koll unan euz o gwella servijerien, gand maro an ao. L. Toulemond. Ganet e Pont 'n-Abad e 1896, e oa eet da vev e Pariz leh m'eo greet atao eul labour euz ar henta e penn ar strolladoù hag ar hazetennou breizeg. Kalz euz on lennerien o-devo keuz d'ar pennadoù gouizieg ha dudiuz, skrivet gand eur spered digor ha ledan, a gaved bete vremañ e « *La Bretagne à Paris* ». Nag a skriva-gnerien hag a arzourien vreten a zo bet roet da anaoud e-mêz euz o bro a-drugarez da bluenn ampart an ao. Toulemond. Ar Bleun Brug a zalho soñj anezañ da viken, rag eñ eo e-noa skrivet ar brasa meuleudiou euz or gouelioù kaer. Met dreist-oll, an oll vrezonegerien a ranko diskouez eun deiz o anaoudegez-vad d'an hini e-noa labouret kement a-hed e vuhez evid ma vije digoret ar skolioù d'ar brezoneg. Dezañ dreist-oll eo e tleom lezenn 1951, ha daoust pegen bihan eo al leh roet ganti d'ar brezoneg er skolioù, n'eus ket kalz tud hag a oufe peseurt skolioù e-noa kavet L. Toulemond war e hent ha da beseurt diesteriou e oa bet treh. Ar Bleun-Brug, hag e-neus greet kement evid tenna mad ar brezoneg diouz al lezenn-ze, a ginnig e hourhemennou a gengañv da intañvez ha da vugale L. Toulemond.

Nevez deut er mêz a zindan ar wask. — R. Couffon et A. Le Bars.

Répertoire des Eglises et Chapelles du Diocèse de Quimper et Léon.

Eur pezh leor a 550 pajenn.

1.800 lur an tamm — ar mizou kas 200 lur.

Evit kaout al leor skriva da *Association diocésaine de Quimper et du Léon, Evêché de Quimper, Finistère.* — C.C.P. 394-28 Nantes.

Rak-skrid gand an ao. 'n Eskob Fauvel.

Eur skeudenn diembann euz Sant Erwan.

Da geñver Gouel Sant Erwan 1959 ez euz bet tennet nevez 'zo eur gartenn-bost warni lodenn an neh euz korv Sant Erwan, diwar eur skeudenn e men-greun a zoare a zizoloas Ronan Caouissin dre zigouez e lloz presbital Plougounven (Bro-Dreger) ma tennas diouztu eul luhskeudenn (foto) anezi.

Ar poltred-ze eo a vez kinniget bremañ gantañ d'or henvroiz. Penn Sant Erwan, heo-buhezeg da weled a vez gwelet war eur foñz o taolenni a bep tu d'ar Zant, en eun tu an den pinvidig, en tu all ar Paour, o-daou ive skeudennou-men diwar dorn Breiziz. Dindan ema an diou werzenn vrudet a gustumer kana da Ouel Sant Erwan :

« N'en euz ket en Breiz, n'en euz ket unan

« N'en euz ket eur Zant evel Sant Erwan.

Skriva da : *Ronan Caouissin, Editions Britta-Films, 55, rue La Fontaine, Fontenay-aux-Roses (Seine)*. Priz ar gartenn vras sklasennet : hanter-kant lur. Distaol bras a vez greet d'ar strolladou o dije c'hoant da werza ar gartenn evid o hont o-unan.

Ar Zoñj euz on Anaon.

E peb parrez, koulz lavared ez eus bremañ eur Helh pe eur hevreñn pe eur bagad. Perag n'ez afent ket, deiz an Anaon, da lakaad bleunioù war ar beziou en o 'farrez ? Felloud a ra din lavared re an dud-se o-deus labouret kement a-hed o buhez evid ar brezoneg hag evid ar vro. Kalz re a vezioù a vez dilezet. Piou a ya war bez F. Vallee, war hini L. Herrieu ? Ha kant ha kant all ? A-wechou en ho parrez ez eus eur skrivagner, eur soner, eur beleg saver-kantikou, divrud hag ankounac'haet, o kousked e peoh ar bez. Pebez kentel d'ar re yaouank ! Karet em-bije gweled ar re-mañ, d'ar 1^{re} a viz Du o vond da enori ar beziou dilezet. Ha gwelet e vezo kement-se er bloaz-mañ ?

(*Diwar eul lizer bet digand Kerlann.*)

Evid sevel eur bez da Dir na Dor.

Ur strollad tud euz bro Koadout, an Aotrou Chaloni Brochen, an Aotronez Lebreton, Abad ar Sant, J. Cadoudal euz Boulvriag, Francis Even euz Landreger, Suberbié euz Gwengamp hag an Aotrou Bescond, person Koadout, n'eus n'em glevet evid dastum peadra da zevel, war vez an Aotrou Moal e bered Koadou, e-kichen Gwengamp, eun dra bennag a dalvoudegez hag a zegaso soñj pegen brudet e oa deut an Ao. Moal da veza war dachenn ar brezoneg ha pegen braz e-touez an oll vrezonegerien.

Ur strollad enor e pehini a n'em gav :

An Aotrou n'eskop Coupel, Eskop St-Brieg ha Landreger ;

An Aotrou n'eskop Belec, Eskop Gwened ;

An Tadou Abad, Dom Alexis eus Bodgwen ha Dom Colliot eus Landevennec ;

An Itron Vefa a Sant Per euz Sant-Brieg, a harp al labour.

An Aotrou Moal goude beza savet eun dastumadenn plijuz, Arvorig, a zonjas adsevel eur Gazetenn e brezoneg penn-da-penn « Breiz » embannet beb sizun.

Epad hanter kant vloaz, an Ao. ar Moal en deus dalhet stard en e zorn ar brezoneg. Skrivet e-neus eleiz a draou : Rimastellou, Kontadennoù (piou n'e-neus ket soñj euz Pipi Gonto ?) peziou-c'hoari hag all.

Bretoned vad, kaset ho prof 'vid bez Dirnador da : Chanoine Brochen, St-Brieuc. — C.C.P. Rennes 2063-08.

Diskou nevez.

Ema Kanerien Landivizio o nevez embann eun disk all, warnañ kantikou Troveni vraz Lokronan :

1. Buhez ha maro an Aotrou Sant Ronan. — 2. Pedenn d'an Aotrou Sant Ronan. — 3. Sant Ronan or patron.

Ar re oll o zo bet e Troveni Vraz Lokronan, hag ar re all a houlennno an disk-mañ hep dale, digand an Ao. Abjean, kure Landivizio.

Luz-Kana Intron-Varia al Likès, Kemper, e-neus ivez savet eun disk, warnañ « Adorom oll » eilet gand an ograou, dindan bizied G. Pondaven. Her goulenn digand ar Frère Mazé, Le Likès, Kemper.

Kovig - teo

Kovig-teo, ar skrilh du

a glemm garo :

— Nag ez on divalo !

Ne glevan a bep tu,

neméd goap hepkén,

ha ne welan dén.

E-keid-se, gwelit Skañvig, ar valafenn...

M'henn asur deoh, n'eus ket e bro ar raden

na ken kaer gwisket,

na ken kaer livet.

Sellit pegen skañv eo ouspenn

gand he diwaskell ruz ha gwenn !...

E gwirionez 'm'eus leh da glemm.

N'oa ket e glemmou peur lavaret

ma lamm eur vandenn ganfarted

a douez an dero

war an ero.

Gand liviou marellet

al loenig askellet

ez int trellet.

Ha beh da Skañvig !...

Tapet eo.

Diframmet ez-veo !

Maro ar paourig.

Kovig-teo a gavas gras

kaoud e doull kuz.

Hag e sonje : « Gwelloh c'hoaz

beva kuzet er yeot druz

gand eur zae zu

hag eun toull du !!

.....

An eürusted ne gaver ket

o skedi re dirag ar béd.

V. S.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMPR. CORNOUAILLAISE — C.P.P.P. N° 21697



BLEUNIOU

Pa c'hoarz an heol ken laouen,
Na c'hwég e vez d'am lagad
Ar bleun a bik ar 'flourenn,
Ar bleun a zav a vagad
War mantell ar prad.

Meurbéd eo kaer ar bleuniou !
Meurbéd eo kaer o liviou !
C'hoari a reont er glaster
Ha kana ' reont e douter
An nevez-amzer.

Petra 'ta eo eur vleunienn ?
Eun ene flamm ha kempenn.
Pa vez kant liou kemmesket
'N ' eur boked kaer marellet,
Na pebez koantenn !

Eun dornad bleun kant livet
Am-eus gand joa kutuilhet,
Ha war va zaol, 'n eur podig,
Na pegen koant bokedig
Am-eus-me pintet !

Bokedig koant marellet
Ne skuizin ket o solded
Ouz perlez strink ken livet !
Biskoaz plantenn bet gwisket
Evelhout boked.

Bokedou all 'n-eus hadet
Ar Hrouer-Meur ken karet.
E-touez an dud o havan :
Ar bleuniou a lavaran
Eo bugale hlan.

Netra n'eo koant 'vel plahig,
Fichet ken brao gand mammig.
Netra n'eo kaer 'vel paotrig
Ken flamm, ken bea e zremmig :
Lar din eun tammig !

Ar bugel 'zo eur vleunvenn,
Dinamm ha glan e ene :
Bleunvennig koant diere
D'ar mammou war o barlenn.